

Skrivagnerien ha skeudennaouerien kinniget ar bloaz-mañ :

Gellout a rit goulenn al levrioù digant ho mediaoueg a c'hello amprestiñ anezho dre

Levraoueg Departamant Penn-Ar-Bed (Bibliothèque Départementale du Finistère).

Anv	Live	Ti-embann	Skrivagner(ez)
Anna DUVAL GUENNOC	Kentañ-derez	TES	Skeudennaouerez


Anna a ginnig ur stal d'ar skolidi a denn eus an tem « FAR-WEST » :

Pe sevel un « taper-hunvreoù » pe ijinañ ur blantenn ha tresañ anezhi.



Annie COZ	6vet	KVB Skol-Vreizh	Skrivagnerez
-----------	------	--------------------	--------------

Daou romant polis evit ar vugale zo bet skrivet ganti, *Milio hag ar viziterien noz*, e ti Skol Vreizh, hag *Nolwenn, Bim hag al laer*, er rummad Priz ar yaouankiz ti Keit vimp bev. Un trede roman, *Milio e Togo*, n'eo ket bet embannet c'hoazh. Skrivet he deus ivez ur ganaouenn war Su Afrika evit al levr/pladenn KAN AR BED.



Julien LAMANDA	kelc'hiad 2	Keit Vimp Bev	Skeudennaouer
----------------	-------------	---------------	---------------

Julien a ginnig d'ar c'hlasoù skrivañ un istor berr evit Rouzig : d'ar skolidi da skrivañ an destenn ha dezhañ d'ober an tresadennoù. Ret vo d'ar c'hlasad eskemm gantañ meur a wech a-raok an abadenenn a vo dalc'het ur sizhun a-raok ar foar, ez-reol. Embannet e vo an istorioù er gazetennig 'pad ar bloaz....

